

**RIMOU**  
HA  
**GOULENNOU**  
*EVIT AN EUREUJOU.*



E MONTROULEZ ,  
E ty LÉDAN, Impr., e traon ru ar Vur.

Cetu amàn eur plac'h yaouanq

Hac e deus eur speret contant,

A zo diangach a bep lec'h,

Hac a dal hirio qet ha dec'h.

Ha ma na d'eo qet mad d'ho cout,

Certen ec'h ellit mont en ho rout.

Ne douetàñ qet, va mignon coant,

E ve ho ty qen dibourve eus a blac'het yaouanq,

Na zisgasfac'h demp unan da velet,

Certenamant ne vezò qet refuset.

Mes houmàn a zo an daill var he beg

Da veza êt pell zo d'ar vicher eus a vreg.

Me vel merget var e chod cléi

E zeus bet goas o poqat déi :

Cassit-hi buen var he guis,

Gant aoun e defe drouc-avis.

Clévet oc'h eus alies parlant,

O comz deus eur zal caer ha brillant :

Ia, va mignon ; me meus eur zal,

Hac a zo oll carguet demeus a draou leal :

A bep tu demeus an daou gostez,

Ne zeus nemet accajou hac olifes ;

Ha dindan an treid, evit servicha da bave,

Ne zeus hepqen nemet lorenti ha lorc.

Ia, ar zal gaer-mâ zo dre oll decoret

Demeus a beder blanten gaera a ve cavet :

Unan e zéo ar roz, eun all an tulipes,

Eun all ar palm superb, hac eun all ar cyprès.

Ha c'hoas ne meus contet dêc'h netra

Evel e zàn da gonta dêc'h bremâ :

En creiz ar zal-mân e zeus eur femelen

Demeus ar re gaera e veljot birviqen :

E muzellou a zo demeus a roz bordet ;

Michanç e zéo onnes a fell dêc'h da gavet.

Va mignon, gouzout a rit ervat,

Pa gaver an avel eo e rànquer güentat;  
 Ha c'houi, pa gafot discarg d'ho merc'het,  
 Me ho ped, mignonet, n'o refusit qet,  
 Ha c'hoas trugarecait Doue,  
 Pa na reomp eguis Table,  
 En devoa da ravissa ar merc'het  
 An devez memes demeus o eured.

Cetu amàn eur plac'h yaouanq,  
 Zo quer caer hac an eol brillant;  
 E diou chod a zo ruz evel ar ros,  
 Distingoet evel an deiz diouz an nos.  
 E zal a zo quer caer hac ar c'hrystal;  
 Laqat a ra calon mab da dridal :  
 Ha ma na blich qet homàn déc'h,  
 Na ouffen qet petra da ober déc'h.

Troublet meurbet eo va speret,  
 Pe eur banne re ami be evet,  
 Mar deo honnes ar femelen  
 A meus grêt anei ar goulen ;  
 Mes ar plac'h-se, pa zeo deuet,  
 Ne deo qet da veza refuset.  
 Me a zo i've eun den yaouanq,  
 Hac a meus eur speret contant,  
 Hac a zo diangach en peb lec'h,  
 Hac a dalvez hirio coulz ha dec'h,  
 A laqayo va dorn en he hini,  
 Hac a yèl ganti da zemezi ;  
 A ray outi peb contrat mad  
 Evel a eure e mam d'e zad :  
 A brometto dèi fidelité ha fe,  
 En qeit ha ma vin en bue ;  
 A zalc'ho mad dèi bete mervel :  
 Ne ouffen qet lavarat güell.

Arça eta, ma mignon qèz,  
 Cedi a ràn ganéc'h ar plac'h nevez ;  
 Mont a ràn d'e digass déc'h d'an nôr :

Ret mad éo da eun den parlant ;  
 Ma ne respontomp qet an dud ,  
 E teufent da lavarat e zomp mud .  
 Sònjet hon eus da ober voel ,  
 Sevel amàn eur zantinel ,  
 Hac a vo grêt en form eun ty ,  
 Evit respont d'an dremenidi .  
 Ha c'houi ive , va mignon qèz ,  
 Mar oc'h eus marc'hadourez  
 Pe da brena , pe da voerza ,  
 Partiit buan gante da guenta ,  
 Evit Montroulez pe Gastel ,  
 Hac e profitot ne vo qet pell ;  
 Eno e cafoat honestamant  
 Peadra evit hoc'h arc'hant .  
 Eur garante evel honnes  
 Ne all qet finissa james .  
 Credi a ràn hoc'h eus pedet  
 Jesus hac e Vam beniguet  
 Da asista en oc'h eured .  
 Demp-ni bremàn , compagnuez ,  
 Da offr hor peden assambles  
 Er sacrific an oferen ,  
 Da c'houlen graçou souveren ;  
 Hac evidomp hac evite ,  
 Gouennomp graçou ouz Doue .  
 Er fin , o tont da finissa :  
 Dalit e dorn , croquit ennâ ;  
 Promettit dezi fidelite ,  
 Hac hi a brometto déc'h ive .  
 Cetu aze e dorn deo ,  
 Doue dre e c'hraç d'ho cunduo .

**FIN.**



## DEVERIOU AN DAOU BRIED

AN EIL EN ANDRET EGUILLE.

( Chabistr 6 eus ar C'hod Civil. )

An daou Bried a dle chom fidel an eil d'eguile , hac en em zicour an eil eguile .

An ozac'h a dle difen e vreg , hac ar vreg senti ouz he ozac'h .

Obliget eo ar vreg da ober he demeuranç gant he ozac'h ha d'e heulia en qement lec'h ma caro chom .

An ozac'h a zo obliget d'he diguemeret en e dy ha da fournissa dezi qement tra a zo red de gaout evit beva hac en em wisqa , hervez e c'hallooud hac e stat .

Cetu aze ho teveriou :  
Dalc'hit mad dè da beb heuriou .  
Mar bezit fidel entrezoc'h ,  
Ar Barados a c'honezoc'h .



E Montroulez , e ty LÉDAN , etraon ru ar Vur .